





A HED AN NO'Z

Gant kalon.




Môr a du - di eo pre - de - ria

Holl a-unan.



A hed an noz. Din - dan bolz an

Holl a-unan.




Nenv o skle - - ria A hed an noz,



'Tra ste - - re - - den - - no 'uz d'hon fenn


Rall.



Pe - domp holl a ga - lon la - wen;

A tempo

Holl a-unan.



Dis-tân ha ner-zuz ar beden A hed an noz,

Môr a dudi eo prederia
 A hed an noz,
 Dindan bolz an Nenv o skleria
 A hed an noz ;
 'Tra steredenno 'uz d'hon fenn
 Pedomp holl a galon laouen !
 Distân ha nerzuz ar bedenn
 A hed an noz.

Dreist d'an oabl glaz steredennet
 A hed an noz,
 'Sav meurded divent an Dreinded
 A hed an noz ;
 Euz ho kloar skeduz, o Doue,
 Gret ouzimp eur zell a drue,
 Ouz hon Bro, ouz hon yez ive
 A hed an noz.

En hoc'h enor kanfomp seder
A hed an noz ;
Hon mouez a zavo er splander
A hed an noz,

Da c'houlen Peuc'h, Unvaniez,
D'imp-ni ha d'hon Broadelez,
Ha da veuli ho Touelez
A hed an noz.

ABHERVE.

KANAOUEN SOUDARDED YAOUANK BREIZ-IZEL

PELL DIOUZ HON BRO

WAR DON : *A hed an noz.*

Eur vouez rust he deuz hon galvet
Pell diouz hon bro ;
D'an arme ni 'renko monet
Pell diouz hon bro.
Pegen kri eo 'n em zistagan
Diouz pez a garer ar muian :
Hir amzer ni renko gouelan,
Pell diouz hon bro !

D'ar c'herio ni a vo kaset
Pell diouz hon bro,
E-touez tud disanve hadet,
Pell diouz hon bro ;
Hep kavet na kar na mignon
Da laouennad d'emp hon c'halon.
O ! pegen trist stad ar Breton,
Pell diouz e vro !

Tad na mam mui n'hon c'hennerzo
Pell diouz hon bro ;
Breur na c'hoar mui n'hon zeveno
Pell diouz hon bro.
Na welfomp mui hon zi didrouz ;
Na kleier hon iliz parouz,
Na glevfomp mui o mouezio dous,
Pell diouz hon bro.

Evel bleuniou diswriennet
Pell diouz hon bro,
Ni a chomo gwir Vretoned
Pell diouz hon bro ;
Bugale leal da Zoue
A vo holl kennerz hon bue,
Keit ma vo gwasket hon ine
Pell diouz hon bro.

LAOUIK.